

Meurriad


#27

BANNOÛ-TRESEZ
HA C'HOARIOÛ !

ANNIZIEK - MEURZH 2005 - 5 €

NICOBY • LE DORVEN • KILLOQUE • AURELIEN.H • FANCH • LE TREUST • LOL •
FOURNIER • BALAN • CHOUIN • ROBOT • MORVAN • SANGLA • DEPIERROIS

AR
CHAWDER
POTEMINEK
Nicoby



MESTR, BEC'H DE'I WAR
BABOURZH... ME 'GRED DIN
EZ EUS UN DRA BENNAK
EN DOUR!



MESTR!
DEUIT DA WELET
AN DRA-SE!
DIGREDUS EO!

UR VORGANEZ!



POUCH

BISKOAZH!
ME 'GRED DIN
KLEVET ANEZHI
O KANAN.



AN ERGERZHADES R. LE DORVEN



A... AN HAÏV... AR VAKARSOÙ, PENaos CHOM
DISEBLANT DIRAK KAERDER AN DONVOR...



EVIT T ENNAH AR BRASAÑ GOUNID POSUPL
EUS AR VAKARSOÙ EO G'WELLOC'H



... EN EM ZIZOBER EUS AN TRAOÙ DIDALVOUD...



SETU DISTROB
AN HENT.



ATAV AR MEMES TOULOMPI GANT
AN HOLL VEULKEED-SE HAG A YA
KUIT D'AR MEMES KOULZ...



RO DIN UR GARTENN!
DONT A RA UR MEN-
NOZH DIN...



UN HENT ALL A ZO!
A. A. A. LEUSKEL A RIN
ANEZH O SAC'NET...



KENO!
RUZERIEN!



DAL, KEMER AR GARTENN,
HENTAÑ A RI AC'HANON !



MA FELL DIT, MET
PELEC'H EMAOMP ?

N'EO KET START, KUITAET
HON EUS AN HENT PRAS EVIT
KEMER AN HINI BIIH'N

A... NEUZE VO DAV KEMER
WAR AN TU KLEIZ BREMAÑ ?

KET ! WAR AN TU ALL
EVIT MONT DRE AZE !



MET GWELET A REZ MAT E TISTROIMP
WAR HOR C'HIZ O KEMER AN HENT-SE!

KET HEMAÑ, AN
HINI ALL EO !


HAR ? DEHINI, LAREZ ?

HEMAÑ 'LÂRAN DIT !
H.E.M.A.N !!!



DIVALL OUZH AR
GORNDROENN !!

HA KAOCH' !



MA C'HARR !
MA C'HARR BRAV !



HA KAOCH' ! AET AR STUR DA FALL ! MET
BOULLC'HURUN ! N'EUS KET DA GREDIÑ,
KORNDROENNOÙ EVEL-SE GANT FOZIOÙ
A SEURT-SE ! MALLOZH 'TOU !

N'EUS KET DA DORTAL,
DAV GERVEL AN DISA-
CHEREZ !



DEUIT D'AM HEUL !
BREMAÑ E VO DAV
KAOUT UL LOCHENN
BELLGOMZ EN TOULL
KOLLET-MAN !!



MAT 'VEFE BET DEOMP
KEMER UR GARTENN...



VARRRRRRRR



VARRRRRR

DA VEZAÑ KENDALCH'ET...

TOURELL AR FALTAZI

AURELIEN H

Dizehan e welan tud hag a lavar eo re start mont keit eus un dourell. N'eo ket diaes e gwir ...

... Traualc'h eo kaout ur gartenn ! BARREK !

Met ivez peadra d'en em zifenn ! E!E!E!



Ha gant-se, sovezhadenn ebet ! Sur hag anat !

Er-maez e vof, dizale...



A... /A ! E... Tan a ranker kaout ivez ! Met aze...

Gety ...

MAAAMMIG !!!

Kan ar Bobl PONDİ

15, 16, 17 A VIZ EBREL



d'ar gwener 15
C'hoariva "Malachap Story"
get c'hoarivari Langetdig

d'ar sadorn 16
Prezegennou
Diskouezadegou
Baleadenn
Film
Pred e kaniñ
Fest-deiz/fest-noz
(Loened Fall, Termajik, ObayaAc)

d'ar sul 17
Kenskrivadegou
Abadenn veur Kan ar Bobl
Fest-deiz/fest-noz
Marc'had ar boderien

EVIT AR RE YAOUANK

d'ar Sadorn 16 d'enderv
Kani'tta bugale - Priz Polig Monjarret

D'ar Sul 17 a viz ebrel
Kenskrivadeg ar skolioù

Rummad ar skolioù - Krouidigezh ar re yaouank

Savet eo ar gontkrivadeg-mañ evit breudeal kanerien ha kanerezed yaouank (dindan 18 bloaz), e-unan pe a-stroll, heñtlet pe get, o kinnig :
- ur ganaouenn hengounel (da seloañ pe da gannañ)
- ur ganaouenn a vromañ e brezhoneg pe e gallo
- ur groudigezh (diemoann, e brezhoneg pe e gallo)
Kinnig a rank e aberrañ war al lestronenn dirak ur jurit kanerien loreañ!
Kan ar bobl, osantet ganto reiz d'ar re yaouank allou ha sikour da vent war-raok.
Ur bochad levrioù a vo da c'halveunil : levrioù, pladennoù, stajoù hag ivez dreist-holl, ar priz Polig Monjarret.
Kregiñ a ralo dia 9 eur d.m.
Enskrivadurioù d'ar 02.97.25.70.90
A-BAOK AR C'HEHTAÑ A VIZ EBREL

Troioù dibab :

Gwerliskin d'an 12, 13 a viz C'hwever - Plouzelin d'an 13 a viz C'hwever
Guignen d'ar 25, 27 a viz C'hwever - La Meaugon d'ar 6, 7 a viz C'hwever
Maet-Karaz d'an 13 a viz Meurzh - Plouër-sur-Rance d'an 13 a viz Meurzh
Sant-Ivi d'an 19 a viz Meurzh - Kawan d'ar 25 a viz Meurzh
Foujera d'an 20 a viz Meurzh - Langonned d'an 20 a viz Meurzh
Missillac d'ar 26 a viz Meurzh - Kaedan d'an 10 a viz Ebrel

Titouroù : 02.97.25.70.90 - www.radio-bro-gwened.com






nicolas filloque



8

Komzoù YAOUANK



Yoann
soner uilleann pipe



Anv: **AN NEDELEG**
Anv Bihan
Yoann
Oad: 17
Al liv a blij dezhañ:
gwer
Ar blantenn:
ar melchon
Ar sport:
ar rugbi
Ar film:
" Braveheart "
gant Mel Gibson
Ar ganaouenn:
**" Losing my reli-
gion "**
gant R.E.M.
Al levr:
**" Si c'est un
homme "**
gant Primo Levi
An eur, war an deiz:
diouzh noz,
evit mont da seniñ
Ar meuz: **ar pizza**
Ar vro: **Iwerzhon**

Yoann, perak an uilleann-pipes kentoc'h eget ar biniou ?

Ur son tomm ha dous en deus ar benveg. N'eo ket tagus. N'eo ket kreñvoc'h eget ar violoñs pe an akordeoñs. Aes eo meskañ e son gant ar biniou all, ar pezh n'eo ket ken anat evit ar biniou. Ha meskañ anezhañ gant ur bern seurtoù sonerezh all : rock, jazz, sonerezh klasel pe c'hoazh sound system. Entanet on kentoc'h gant an tem iwerzhonat a c'houlenn ur mestroni disheñvel ouzh hini ar biniou.

Penaos eo deuet deoc'h ar c'hoant seniñ ?

Ar wech kentañ em eus klevet an uilleann-pipes e oa a-drugarez d'am zad. Dedennet eo gant ar sonerezh geltiek ha prenet en doa pladenn ur c'hoarier brudet-kenañ, Davy Spillane. War-lerc'h ez con bet dedennet muoc'h-mui hag alies em eus selaouet ar

c'hoarier breizhat Ronan ar Barzh o seniñ gant Dan ar Bras evit abadenñ " Héritage des Celtes ". Neuze e teuas c'hoant din kregiñ gant ar benveg. Diwezhatoc'h on aet gant ma familh e Gouel Etrekeltiek An Oriant gant mennozh ar benveg ingal en ma fenn. Aet on d'an holl abadennoù a ginnige sonerien uilleann-pipes. Ha prenet em eus unan, kerkent ha distroet. Ur practice da gentañ, evel-just. Hag ur gwir venveg goude.

Un diforc'h a zo etre ur c'hoarier uilleann-pipes amañ hag unan all o chom e Bro-Iwerzhon ?

Un diforc'h ? Ar yezh ! N'eus ket a ziforc'hioù all, ar spered a zo ar memes hini. Ar c'hoarier breizhat a gemero e kont hengounioù an Iwerzhoniz. Met ar pezh a liamm anezho a zo lakaat war wel jig-où ha reel-où eus ar c'hentañ ha kaout plijadur d'en em gavout

... pleustriñ a ran ,
un eurvezh
bemdez ha
muoc'h e-pad
an dibenn-
sizhun "

asambles en-dro d'un daol en ur pub. Ur gwir blijadur hag ur binvidigezh digemm eo.

Pegeit amzer ar sizhun e pleustrit ?

Un eurvezh bemdez ha muoc'h e-pad an dibenn-sizhun.

Piv eo ho skouer war dachenn ar sonerezh ha perak ?

Un bern skouerioù am eus evit ar pezh a sell ouzh ar sonerezh iwerzhonat, ha dreist-holl war danvez ar biniou-ilin. Davy Spillane, ur c'hoarier uilleann-pipes hag en deus mesket e venveg gant rock, jazz ha sound sistem. Ronan ar Barzh evit e deknik c'hoari hag a zo dibar pe c'hoazh John Mac Sherry evit e zoare da vestroniañ e venveg. Bez' ez eus reoù all c'hoazh hag o deus sikouret ac'hon kalz evit dont a-benn da gaout ul live dereat : Loic Blejean, ur c'hoarier ampart-kenañ hag en deus kemeret perzh er strollad Glas er bloavezhioù 95-96, Brendan Ring, al luder hag en deus krouet ma benveg, bet kampion Iwerzhon e 1991 hag e vaman dirazañ abalamour d'e deknik c'hoari

ha d'e labour krouiñ. Levezonet o deus ac'hon ha roet c'hoant din da vont war-raok war dachenn ar sonerezh iwerzhonat hag an uilleann-pipes.

Betek pelec'h ho pije c'hoant mont gant ar benveg-se ?

Luder am bije c'hoant bezañ. Met n'eo ket ur vicher aes. Dav eo bezañ brudet evit dont a-benn. Arabat din huñreal. Enskiantek on eus ar pezh eo. Ober a rin ur vicher all a-raok kregiñ gant al luderezh. Met chom a raio unan eus ma c'hoantoù diazez.

Petra a rit gant ar benveg pa n'emaoc'h ket o pleustriñ ?

Brikoliñ anezhañ. Reoliek e kasan anezhañ da gempenn. Bepred e trafik an lañchennoù, ar plakennoùigoù koad a ro ar son en ur frañval. Labour zo bepred.

Ha c'hoari a rit biniou all ?

Ya, c'hoari a ran low whistle ha tin whistle ivez. O kregiñ gant ar bodhrañ on ivez abaoe mizvezhioù. Biniou kozh ha bombard a sonan ivez. Met siwazh, en em ouestlañ nemet d' an uilleann-pipes a lak ac'hon da goll barregezh war ar biniou all.

Peseurt ali a rofec'h d'ar re o dije c'hoant ober evelloc'h ?

Dav eo bezañ mennet-tre gant ar benveg. Ha selaou kalz sonerezh iwerzhonat, a bep seurt orinoù, tonioù disheñvel, bezañ digor war a bep seurt stil c'hoari. Mont da welet abadennoù pa c'heller. Kaout pasiañted ha youl.



e-pad gouel Brest 2004



O seniñ gant va c'hoar Klervi



me ha va c'hoar Klervi




portred of a "serial soner"



O seniñ gant ul low whistle

EUS UR GER D'UNAN ALL

Pep strobard lizherennoù a vo implijet 2 wech evit derou ur ger ha dibenn unan all
 Gerioù divoutin ha verboù displeget a zo aotreet. Ne vez ket taolet kont ouzh an " " war an anv-verb.



DEL	FIN	TEI	PAK
VAL	TOR	REN	...
TEN	MAL	SAN	...
KAR	REN	TOL	...
KAD	TER	TOR	...
MEL	TEL	SEK	...
FAN	KES	ENE	...
TIN	PIN	SAN	...

AL LIZHERENN A VANK

-	E	U	N	E	U	D
A	T	R	-	D		
G	W	-	N	I	Z	H
L	I	P	-	T		
T	I	R	-	T	E	N

kavit al lizherenn a vank a-benn sevel gerioù. Ur wech echu e kavit anv tud anavezet mat er vro.

N	-	R	Z	H				
P	-	I	Z					
K	O	A	-	A	L			
K	O	R	-	A	N	D	O	N
K	E	L	L	I	-	O	U	

DA BEP SIFR E LIZHERENN

2	4	3	1	5	6	3	1	2
6	1	2	4	2	1	7	7	
6	3	4	7	8	4	2		
6	3	1	2	1	3			
6	3	1	7	7				
4	3	1	5					
3	1	2						
1	2							
1								

Leugnit ar gael o lakaat lizherennoù e plas ar sifroù (Dalc'hmat ar memes lizherenn evit sifr-mañ-sifr, anat.)



A-BLAEN :
 1. Loen-kezeg - 2. Tud sot - 3. Ardivink labour-douar / Pezh ec'hon - 4. C'hoari a blij katz d'al Leoniz - 5. Etrezek - 6. Barn a zouger warnañ an-unañ - 7. Ilboued - Spoum - 8. Fin an nac'hadenn - Kleñved a c'heller koll e vlev diwarnañ

A-SONN :
 I. Pesk plat - II. Meskad gazoù / N'eo ket aze
 III. Armead / Stumm ar verb bezañ
 IV. Glazard ramzel - V. Nerzh an tan
 VI. Yezh slavek - VII. Ger-mell / Stumm ar verb bezañ - VIII. Benveg seniñ

AR MILENDAL

Loc'hañ a rez eus "POUR" o klask ur c'hombod all, stag ouzh an hini kentañ gant ur c'hostez, ennañ ur ger disheñvel war-bouez ul lizherenn hepken. Hag evel-se betek en em gavout gant "ROUZ".
 Arabat tremen morse dre ar memes kombod.

POUR	MORU	FORN	FRON	FROM	DONT	DENT
PEUR	MOUS	MONS	FOÑS	FONT	KONT	DANT
KEUR	LOUS	SILO	PUNS	LEÑV	NEÑV	PENN
KRIN	KREN	LISE	LIVE	LEVE	LIES	TENN
MENT	KENT	KONT	TRES	SORT	SONT	TEÑS
KILO	LOEN	KOAN	STIR	REDI	PRED	PERE
KILE	MOAN	POAN	SIRK	KRIN	KREN	PERI
KELT	LETI	PAOU	LAOU	KAOU	PREN	PERS
KENT	TANK	MANE	LEAN	REAL	PARE	FREV
KUÑV	KANV	MANK	KIAN	STOL	TOUS	TOUZ
LOAN	LANV	KANT	SANT	STAL	KEST	ROUZ

horus & thot



David Le Treust.



MESK-DIVESK

Meskit al lizherennoù a-benn sevel gerioù all.

Kregiñ pe echuiñ a raito pep ger nevez gant ul lizherenn ruz

KLASEL →

ARCHER →

LABAN →

MARE →

TESKAN →

AR GER KUZH

E-tal pep ger ez eus ur sifr o reiñ da c'houzout pet lizherenn eus ar ger kuzh a zo en o flas

F	R	E	G	U	S	0
P	O	B	L	E	T	2
T	O	L	G	A	D	1
H	A	E	L	E	R	2
G	W	E	N	A	N	0
G	E	O	T	E	G	1
D	O	U	G	E	N	1
E	L	E	V	E	Z	2
G	A	L	A	N	T	2
F	I	L	M	A	N	2
E	L	U	M	I	N	1
R	A	O	S	K	L	1
						6

PEMP HA SEIZH

er gael-mañ eo dav lakaat peder gwech ar sifr 5 ha daouzek gwech ar sifr 7. Met diwallit !!
Sammad ar sifroù pe e vefent a-sonn, pe a-blaen pe a-dreuz a vo par da 26 DRE RET !

		7	
5			

E KAMBR AR STERED

En ur implijout lizherennoù ar c'hoari e ranker dizoleiñ ha plasiñ c'hwec'h ger peder lizherenn

P

N

L B E Z L
E I R U N

OLIER & WAOU Pebezh striv

I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX	X
1									
2									
3									
4									
5									
6									
7									
8									
9									
10									

A-BLAEN :
1. Matezh ar c'hure - 2. Alvaonet / Epañ te
3. Memes / Rannig diskouezañ - 4. Araoenn mes-
ket / Skediñ - 5. Pezh arreburi / Ger-mell /
Notenn sonerezh - 6. Tachenn dindan c'hoat
7. Nac'hadenn / Zo si ennañ / Yezh a gomzet e
kreisteiz Bro-C'hall gwezhall - 8. Notenne /
Obererezh neuiñ - 9. Rousin frondus / Ensavadur
ketenn - 10. Binviji da zastum delioù pe plouz

A-SONN :
I. Kelaouenner - II. Dastum kaoc'h-kezeg / Priente
III. Araoenn / Stumm ar verb bezañ / Endalc'her
bihan - IV. Spanaer / Diazezerien Breizh
V. Kanell / Sifr a-bouez er jedoniezh / Rannig dis-
kouezañ - VI. Dibenn-verb / Nann - VII. Strakerezh
VIII. Liñvenn deveret eus an alkool / Vi -
IX. Nac'hadenn / Arouez kimiek an aour /
Unanenn dolz a wezhall - X. A-raok an ugentved

Kinniget gant Patrice MARQUAND

EUS UR GER D' UNAN ALL

UR GER + UL LIZHEREENN
= UR GER ALL

Evel-just e vo ret dit
cheñch plas al
lizherennoù a-benn
kaout ar ger nevez

(n'eo kinniget nag en ur stumm lies nag en ur
stumm verb displeget)

G	E	D	+	E	=	
T	E	V	+	E	=	
T	E	R	+	E	=	

S	A	N	T	+	A	=	
A	L	A	N	+	B	=	
R	E	D	I	+	D	=	

M	A	L	A	N	+	A	=	
A	N	T	R	E	+	D	=	
T	R	E	D	E	+	A	=	



O paouez dont er-maez emañ TITEUF e Brezhoneg, embannet gant ti-embann BANNOU-HEOL. Daou vloaz 'zo eo bet graet an droidigezh gant pevareidi ar skolaj DIWAN, er Releg, hag o c'helenner Gwenole BIHANNIG. Distreim a ra pemp anezho war ar sonjou o deus dalc'het eus an dro-gaer-se.

Ur blijadur eo bet lakaat Titeuf e brezhoneg ?

Klervi : Ya. Plijus-kenañ. D'ar poent-se e oamp e pevare klas ha dedennet-tre e oan gant Titeuf. Hiziv an deiz, n'eo ket al levr ar blij din ar muiañ, met plijet on bet gant al labour-se...

Melaine : Lenn a raen an istorioù-se e galleg. Setu treiñ e brezhoneg a blijfe din dreist.

Soazig : Brudet eo an embannadur e galleg. Lakaat e brezhoneg komzoù harozed ar re yaouankañ a oa ur bariadenn...

Marie : Gwelloc'h eget studiañ ar yezhadur... Un doare farsus e oa d'ober gant ar brezhoneg

Tangi : Plijus e oa klask gerioù gros hag anvioù d'e vignoned.

Soazig : " Pichoù nul ", " Kêno "... a zo gerioù nevez, en ur brezhoneg a-vremañ, mat d'ar re yaouank evit deskiñ gerioù gros, evel ma implijont holl er vuhez pemdez...

Ha disheñvel eo eus Boullig ha Billig ?

Klervi : Ur yezh dichekoc'h eget hini Boullig a zo gant Titeuf.

Marie : Sioulloc'h ha sevenoc'h eo Boullig ha Billig, gwir eo. Tostoc'h eo Titeuf ouzh ar pezh ar wirionez, ouzh ar pezh a c'hoarvez er porzhioù-skol.


Piv eo an dudenn a blij deoc'h ar muiañ et levr ? Ha perak ?

Tangi : Denez an hini eo a blij din ar muiañ peogwir eo en a ra ar muiañ a sotonioù farsus. Ur mignon bras eo da Titeuf ha gwelet e vez a-hed al levr.

Soazig : Plijet on gant Titeuf rak en a hini eo a zo e penn ar strollad hag a ra ar pep brasañ eus ar sotonioù. Doare soñjal ur gwir vugel a zo gantañ met plijus eo da zizoleiñ.

Klervi : Evidon eo Yannig. Sotonioù a ra hep gouzout dezhañ. Farsus eo e benn.

Melaine : Disheñvel-kenañ eo an eil eus egile. Setu ez eont mat, holl asambles. N'eus ket unan a blijfe din gwelloc'h.



Penaos e tisplegit e ra an haroz-se kement-se a berzh ?

Marie : Tost eo e droioù-kamm ouzh re ar vugale. Lakaat a ra ac'hanomp da soñjal ennomp.

Klervi : Berr eo an istorioù.

Melaine : Farsus eo e istorioù, gant e droioù-lavar, e vod da gomz...

Tangi : Un doare skañv ha soupl a zo d'an tresadennoù. N'int ket karrez, tamm ebet.



Dedennet oc'h muioc'h gant Titeuf breman, ur wech kaset al labour-se da benn ?

Melaine : N'on ket. N'hon eus ket mui ar spered a oa ganeomp d'ar poent-se. Met roet en deus din c'hoant adlenn bannoù-treset Titeuf.

Soazig : Dibaseet eo Titeuf a-fed gerioù gros ha darempredoù merc'hed-patred. Met plijus eo da lenn, memestra...

Tangi : Un tammig. Dedennet e oan gant Titeuf a-raok, dija. Lennet em boa al levr-mañ e galleg. Ha c'hoarzet em eus c'hoazh kement gant hemañ, e brezhoneg.

Marie : Pa oamp o treiñ e taolemp kont ouzh ar pezh a lâre. Ha neuze e kavemp soutil e farsadennoù. Pa welan ul levr eus ar rummad e teu soñj din ouzh al labour treiñ hon eus graet war unan anezho. Setu ma 'z on tec'hetoc'h da lenn istorioù evel-se.

Petra a lârfec'h d'ho mignoned evit ma lennfent al levr ?

Melaine : Ur blijadur eo atav lenn istorioù Titeuf. Mui pe vui a blijadur a vez, hervez an oad...

Klervi : Plijus eo, pa ne vez ken evit kenveriañ an destenn e brezhoneg ouzh an hini e galleg.

Tangi : Ken farsus eo e istorioù e brezhoneg hag e c'hellont bezañ e galleg.

Soazig : Mat eo evit ar re o deus c'hoant c'hoarzhin ha gwelet skeudenoù brav. Ul lañs eo evit ar yezh. A-bouez ha dedennus eo e vefe troet levrioù all a seurt-se pe eus un dastumad all.

Marie : Bep un tammig e teu ur seurt mignoniezh da liammañ al lenner ouzh an haroz. C'hoarzet kalz e vez gant troioù-kamm an dudenn, o welout ar pezh a c'hoarvez gantañ. Hag ouzhpenn... Troet eo bet e brezhoneg gant Pevareidi 2002-2003 Skolaj ar Releg. Gwellañ klasad ar bed !



titeuf - KENÔ BED KRIZ
embannet gant **BANNOU-HEOL**
48 pajenn - 3,6 euros

www.b-heol.com

ADKAV DA HEUL UR BLANKENNAD TENNET EUS AN ALBOM-MAV



* tennet eus an albom KENO BED KRIZ embannet gant BANNOU-HEOL





OLA! TUD ZO E KER VIZU?



BIZU! KLEVET E HUS?

?



PE... PETRA ZO?

DEIZ MAT DEOCH! MA HIR A GANTREADENN AM C'HAS E-TAL HOCH ANNEZ.

HAN?

NE GOMPRENAN NETRA ER PEZH A LVAR!



PENN-ROUZIG! PETRA 'TA EO AR SAC'H-SOUBENN-SE?

HENNEZH ZO TECHET EUS E LIORZH GANT AON RAK AR GASTER.



LIOZH, LIOZH... DONT A RA DA SONJ DIN.

EVEL-JUST! ME EO PAOTR AR SONJOÙ EN TI-MAN!



GWELOMP... MMM... A SETU! OBLA?! HENNEZH EO...




MARC'HEG AL LIORZHOU!



MARC'HEG AL LIOR CHAOUS!

OLA! DINDALL TA!



SCHNOGBUL, DEUIT BLIAN, ERRU EO MARC'HEG AL LIORZHOU D'HOR GWELET.



SCHNOGBUL!



AET EO DA BOURMEN 'MICHAÏS.

NE VEZ MORSE AMAN RA VEZ EZHOMM.



ME EO MARC'HEG AL LIORZHOU.

DONEMAT! ME EO BIZU.

HA ME! MUKEZ!




SCHNOGBUL IVEZ A VEV EN TI-MAN! HAG, ISKRISAT TRA...



...DONT A RA BLEUNIOÙ LECH MA TREMEN.





RHESUS

10 DALAN

GERVEL A RAN ANEZHI PE NE RAN KET ?

OBER A RAN !

NE RAN KET...

GOUDE ...

MA ASANT-HI E LOC'HOMP 'VIT AR SINE, PE UR FRIKO...

MET MA NAC'H ?!!

EUZHUS EO PAS BEZAÑ GOUEST DA GEMER UN DIVIZ.

PELL GOUDE ...

ALE ! KALON ! DAV KREGIÑ !

EU... SALUD... RHESUS AN HINI EO... EN EM SONJAL A RAEN EUH... HA MAT E VEFE PAKAN UR SKRAMM ASAMBLES FENOZ

PLIJUS VEFE BET , YA... UN NEBEUD EURVEZHIU 'ZO... MET DA ZIV EUR MINTIN EO KOUSKET AN DUD FUR...

WAR-BOUEZ UN TAMM KUDENN TIMING E VEFEN DEUET A-BENN !

24

Mari Barbriand

AR MARG'HEG DALL

Dominique hag Alain ROBOT

BAOOOMMM!

E-KERZH MIZ GENNEZ 1578 E VOE BET DI BENNET AR SOUE LOEIZ XVI, TIGMAT A SA AR CHOLANTEZ HIG AR VENDEIZ EUS DU BREZH BETAH AR C'HOTENTIN.

DA HANTER MIZ DU EHANT DIRAK GRANVILLE.

KAROUT A RAFE AR RE WIENN KEHER AR GER-GRENV-SE EVIT REIN DEGEHER D'O HIGNONED SAOZ A ZIEFE SIKOUR ANEZHO DA ADLAKAT AR BOURBONED WAR DRON BRO-C'HALL.

25





embannet gant :
KEIT VIMP BEV
 22, grand rue
 29520 LAZ
 Pgz : 02.98.26.87.12
 Plr : 02.98.26.80.35
 keit-vimp-bev@wanadoo.fr

Moulet gant
OUESTELIO
 505 st. Julien de la Graviere
 BP 30708 BREST cedex 02

Renner ar gazetenn
Yann-Fañch JACO

Konuzhiañ / Maktennañ
 Tresañ ar c'hoarioù
Owen POHO
 owen.kvb@wanadoo.fr

Tresadenn ar golo :
J.C.FOURNIER

Skoazellerien :
Padrig MAROUAND
Yann GUICHETEAU



Niv. CPPAP : 1005 G 840 75

Istor farsus **Yann Bijer**

An inosanted nemetken !

Ul lostennad tud a oa o c'hortoz e toull-dor ar baradoz. Bec'h a oa war Sant-Pêr o follennata pajennoù e fichennaoueg, e-lec'h ma vez merket an oberennoù, mat pe fall, a vez graet gant pep hini e-pad e vuhez war an tamm douar patatez-mañ.

E-touez an dud a oa o c'hortoz o zro da vezañ galvet gant ar porzhier e oa un den o pilpasat. C'hwenn a oa en e loeroù. Renet en doa ur vuhez fall e-keñver lezennoù an Iliz. A-greiz-tout e klevas hemañ Sant-Pêr o lavaret d'an den a oa araozañ :

- " Un tammig re riboter out bet e-pad da vuhez, met merket eo war ar follenn-mañ, out bet dimezet.

Gouzañvet az peus ur wreg da vuhez-pad. Setu gounezet az peus, dre se, da lodenn baradoz. Deus-tre ma mabig. "


Deuet e oa tro un den gwasket e spered gant e vuhez direizh.

- " Ichekoun ! a lavaras Sant-Pêr ouzh an den. War ar follenn-mañ ez eo merket da anv gant liv ruz. Flaer an tri mil a zo ouzh da heul. Dav e vo din mont da c'houlenn e ali digant an aotrou Doue. "

- " Gouzout a ran, Sant Pêr gaezh ! Keuz am eus da vezañ renet ur vuhez diroll. Met, daoust din da vezañ flouret ha lipet meur a wech krochen ar seizh penn-pec'hed, dimezet on bet ivez, ha div wech ouzhpenn. Mervel a reas ma gwreg kentañ e-kreiz he brud. "

- " Div wech ?! Opala ! N'em boa ket taolet evezh a-walc'h ouzh ar follenn-mañ. Div wech, a lavarez. Atav ! Amañ e vez degermet an inosanted, met ar re zroch ne vezont ket. Skarzh kuit achalenn ! "

Tresadenn ar miz



Gweltaz, 14 bloaz, Skolaj Diwan Kemper

Kasit deomp ho trEsAdEnnoù.
 Ar re wellañ a vo embannet
 keit-vimp-bev@wanadoo.fr

DARIVS Gilles SANGLA

DRE ZEUS ! TAN EN
 TIEZ ! DEVET AN DUD.
 RE ZO RE !



ROSTET E VEZ
 AR PAOUR-KAEZH TUD
 DIZIENN ? NA PEGEN
 DIVALAV, AEROUANT
 DIVERGONT. MARV PE
 GRA PINIJENN !



AT
 ...



ATREDOU, HAN ?
 ATREDOU 'RAFES
 OUZHIN ?

KET...
 MET AT...

AAAT...
 AAAT...

BRASOCH
 EGEDOUT O DEUS
 PAKET LAMM GANIN,
 DIT DA C'HOUZOUT...
 ROSTER BARA
 AN IFERN !



SIFER-
 NIET
 ON !

GLEBOREK EO MA MOUGEV,
 REDOÙ-AVEL E-LEIZH
 ENNI. RIVET ON !
 UN TAMB TERZHIENN AM
 BIJE OUZHPENN. TANET
 TOUT EO MA
 GOURLANCHENN !

SANGLA LOUIS FIN

